



DEVEZH STUDI

Kamp Etrekeltiek Ar
Vrezhonegerion a ginnig deoc'h
un devezh-studi diwar-benn:



Gant Mark KERRAIN


Deomp war-raok gant an
araogennoù!



Gant Olier ar MOGN

Ur veaj en istor ar brezhoneg.

Eus karta sevenadurel Breizh



da Ofis Publik Ar Brezhoneg.



ER GREIZENN
AMZER-NEVEZ
56270 PLAÑVOUR

LAKAIT HOC'H ANV

SADORN 9
A VIZ MEURZH
2024




ROLL AN DEVEZH




9e30 - Degemer ha banne kafe
9e45 - gant Mark Kerrain

DEOMP WAR-RAOK GANT AN ARAOGENNOÙ!


Raktres labour




Ur sell war an islavarenn-stag. Pet rumm a zo anezhi ? ...a / hag a...




Un tamm levrlennadurezh. Pelec'h e vez kaoz eus an araogennoù ?




Ur sell war an araogennoù eeun hag an araogennoù kevrennek.



Ar verboù gant da pe hep da : bet o / bet da?



Nemet : araogenn ?



Poelladennoù a-stroll.

Ganet e Runan, e Treger, e 1952, pa ne veze nemet brezhoneg gant an dud. Hiziv emañ o chom e-kichen Roazhon, ma oa krog da gelenn brezhoneg adal 1969 er skol-noz. Labouret en deus gant Skol an Emsav e-pad 20 vloaz, gant KEAV, UGB, Sav-Heol. Kelennet en deus e skolajoù ha liseoù a-raok mont d'ar skol-veur. Savet en deus meur al levr da zeskiñ ha peurzeskiñ brezhoneg : Ni a gomz brezhoneg (1996), Pok din Jozefin, ha re all. Troet en deus levrioù evit ar vugale hag embannet un 40 anezho. Sevel a ra rimadelloù ha kanaouennoù. Ha dafar a bep seurt evit an deskarded (Trizek kant lavarenn, h.a.).

TUD NAMMET



02 98 95 59 31

Mont e darempred ganimp evit studial ho koulenn hag an ezhommoù kempouezañ


12e30 - Merenn
2e gk - gant Olier ar MOGN




UR VEAJ EN ISTOR AR BREZHONEG

EUS KARTA SEVENADUREL BREIZH DA OFIS PUBLIK AR BREZHONEG

Raktres labour



Un tamm beaj a vo graet da gentañ en Istor ar brezhoneg kement hag adlakaat sklaer un toullad traoù : ur yezh keltiek eo ar brezhoneg, a-viskoazh eo bet skrivet, ul lennegezh kemplezh hag ur yezh unvan zo bet er Grennamzer, hor yezh unvan a-vremañ zo frouezh meur a gantved labour.



Ur poent loc'hañ eo bet Karta sevenadurel Breizh e 1977. Betek en em gavout gant Ofis publik ar brezhoneg. Displeget e vo peseurt pazennoù zo bet, war beseurt diazezoù eo bet savet servijoù ar framm ha penaos e labour hiziv an deiz. Un digarez e vo ivez da respont da gement goulenn a c'hallfe bezañ.

Emezelet ouzh Skol an Emsav e 1976 ha bet e penn-kentañ ar gelaouenn Bremañ. Goude labourat e-pad bloaz evit an embannadurioù Al Liamm e krogas da labourat e Skol-Uhel ar Vro e 1986. Eno e voe sekretour ar Greizenn-enklask war an anvioù-lec'h hag ar panneloù-heñchañ hag a zeuas da vezañ Servij ar Brezhoneg er bloazioù '90. Pa voe distaget Servij ar Brezhoneg diouzh Skol-Uhel ar Vro evit dont da vezañ Ofis ar Brezhoneg e voe e rener kentañ, betek 2007. Rener skiantel an Ofis hag an Ofis Publik e voe war-lerc'h betek mont war e leve e dibenn 2022.

STUMMADUR DIBAOUENZ




4e00 - Bilañs an devezh-studi.
5e00 - BODADEG VEUR KEAV


Ar stajidi a c'hall goulenn ma vo paeet o staj dezhe gant stummadur dibaouez o embregerezh. Savet e vo un emglev etre o embregerezh ha KEAV. A-raok kas o fichenn-enskrivañ e rank ar stajidi mont e darempred gant ar c'henurzhierzh (kenurzh@keav.bzh).



DEVEZH FICHENN ENSKRIVAÑ STUDI


D'ar Sadorn 9 a viz Meurzh 2024

 Anv


 Anv bihan.....

 Chomlec'h

.....

 Pgz

 E-meil

 Da gas da: KEAV
22 hent Moulouen, 29000 KEMPER
keav@keav.bzh

Dont a ran dre ar stummadur
dibaouez

PRIZ

AN DEVEZH

35€ - mizoù pedagogel ha
pred


30€ - evit ar studieren ha
tud o klask labour


+ 5€ skodenn vloaziek

D'ho kelaouiñ: Skol-Hañv 2024

Div sizhunvezh-studi a vo kinniget ar
bloaz-mañ c'hoazh :

IBAN : FR76 1558 9297 5400 9947 27 94 476

 Ar prantad 1añ :
eus ar **Sul 7/07** da noz
d'ar **Sadorn 13/07** da greisteiz

 An eil prantad :
eus ar **Sul 14/07** da noz
d'ar **Sadorn 20/07** da greisteiz

Bez e c'hellit dibab chom ur sizhunvezh hepken, pe chom an div